

+

2vet Sul an Azvent

*"Me ho padez en dour evit ma teufec'h da cheñch buhez. (...)
Eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan. "*

Breudeur ha c'hoarezed kaer,

An eil Sul-mañ eus an Azvent a gas ac'hanomp d'ar gouelec'h, e-lec'h ma 'z eo Yann-Vadezour o prezegenniñ Rouantelezh Doue hag o badeziñ. Diazezet eo prezegenn Yann-Vadezour war ur galv da cheñch buhez : « Cheñchit buhez, emezañ, rak tost emañ Rouantelezh Doue. » Fellout a rafe din prederiañ ganeoc'h e-pad ar prantad Azvent-mañ diwar-benn ar pezh eo cheñch e vuhez.

E gallek pemdeziek, pa glevomp unan bennak o komz eus e gonversion, e weler da gentañ-penn ur mare dibar ma tivizjont digeriñ o c'halon da Zoue ha respont 'ya' dezhañ. Just eo, met n'eo ket ket tout. Cheñchament buhez a zo diazezet ivez war ar pezh a zo enemgavet en araok da lavarout ur mare e-pad en deus labouret Doue hor c'halonoù hag hor frankiz. Ha cheñch e vuhez a dalvez ivez tout ar pezh a heul ar mare ma hon eus lavaret 'ya' da Zoue hag e tleomp ennañ kempenn hor buhez hag hon doare da vevañ e-keñver Doue.

Cheñch e vuhez n'eo ket graet neuze en ur mare hepken, met un emzalc'h enni en em lezer da vevañ stummet gant Doue evit en em zigeriñ dezhañ. Ar ger *conversion* a zeu eus daou c'her latin *con-vertere* ha dalvez treiñ ouzh Doue. Cheñch e vuhez pe ur c'hemm-kredenn ne dalv bezañ disi pe peurvart met en me dreiñ war-zu Doue eo. Evit kemer ur skouer, evel un nadoz-vor eo hag a ziskouez deomp atav an norzh. Ar c'hemm-kredenn a dalvez treiñ atav ouzh Doue ha klask atav Doue, ne vern an hentoù : hentoù mat ha sur pe hentoù a-dreuz omp kollet warno.

Treiñ war-zu Doue eo neuze ar pazenn gantañ evit ar c'hemm-kredenn. An eil pazenn a zo da glask da gentañ ober ar vat e pep tra hervezh ar pezh en deus desket Jezuz deomp hag hervezh prof ar vadeziant hon eus resevet. E pep zegouezhioù en hor buhez, en tiegezh, er barrez, en hon darempredoù, en diemglevioù, e tleomp atav en em c'houlenn en hor respontoù : petra ' vezo mat evit an den, evit ar re all, hag evidon?

Dont a ran bremañ war an div vadeziant, hervezh prezegenn Yann-Vadezour hag a ra ul liamm etre ar c'hemm-kredenn hag ar vadeziant.

Div vadeziant a zo eta : hini Yann-Vadezour a zo galvet badeziant en dour hag hini Jezuz a zo anvet ar vadeziant er Spered Santel hag en tan. An hini gentañ a zo ul lid a bed ac'hanomp da anavezout ac'hanomp hon-unan evel pec'herien ha da cheñch hor buhez : « Me ho padez en dour evit ma teufec'h da cheñch buhez ». An eil a zo ur sakramant hag a gas da benn ar c'hemm-kredenn en ur reiñ ar pardon evit ar perch'ed, ar pezh ne c'helle ket seveniñ badeziant Yann-Vadezour, hag en ur reiñ deomp tuioù da vevañ ar c'hemm-kredenn en un doare efedus. Ar c'hentañ a aoz ar c'hemm-kredenn ; an eil a gas da benn anezhañ.

Kavout a reomp efedoù an div vadeziant-se e sakramant ar c'hofez, anvet ivez sakramant ar pardon pe sakramant an adunvanidigezh pe c'hoazh sakramant ar binijenn. Peder stad a zo e sakramant ar c'hofez :

- 1) Ar c'heuz : en em welomp evel pec'herien ha keuziañ a reomp hor pec'hed.
- 2) Ar c'hofez : disammañ a reomp hor pec'hed, enviañ anezho, ha kontañ anezho d'unan all.
- 3) Ar pardon : ar beleg a ro pardon Doue dre lakadur an daouarn ha dre lavar an absolvenn.
- 4) Al laouenidigezh : bez' e kasomp da benn ar binijenn roet deomp gant ar beleg.

Lavarout a c'heller e klot an div bazenn gentañ eus sakramant ar c'hofez (ar c'heuz hag ha c'hofez) gant badeziant Yann-Vadezour. Sklaer eo ne dalvezont ket ur c'hemm-kredenn. An daou bazenn ziwezhañ (pardon ha laouenidigezh) a glot gant ar vadeziant roet gant Jezuz er ster ma roont pardon d'ar pec'hedoù hag an dinentez da c'hallout digoll e bec'hed dre ar binijenn da gas da benn.

Breudeur ha C'hoarezed, pal sakramant ar c'hofez a zo teir-hent : reiñ pardon Doue da gement hini a c'houlenn gant eeunder, lakaat posuben en em adunvan gant Doue ha gant ar re all, hag erfin reneveziñ ar vuhez badeziant saotret gant ar pec'hed.

Pep gwir kemm-kredenn a vo un emgav gwirion d'ur mare bennak gant Jezuz, dirazhañ e lakaim hor buez, Jezus a zello outo gant trugarez ha garantez, hag e dieubo ac'hanomp eus hor pec'hed hag e lako ac'hanomp en-dro d'hon treid dre lavarout deomp : « kit, ha diwar vremañ na bec'hit ket ken ».

Graet eo an dud en un doare m'o deus ezhomm eus tud all evit bevañ ; n'int ket emren. An dud ne roont ket ar vuhez dezho o-unan ; he resev a reont. Ne roont ket dezho ho-unan ar pardon ; he resev a reont. Evit kreskiñ, evit bevañ, o deus ezhomm eus tud all. Da vezañ dieubet, ezhomm o deus eus tud all. Ret eo an allded evit ar vuhez. Hag evel-se, ezhomm o deus da glevout unan bennak all o lavarout dezho : « Pardonñ a ran deoc'h ho holl bec'hedoù. »

Eo dre an allded-se a lakaio anezho da vezañ dieubet ; hag ar ger efedus-se eo hag a zeu eus Jezuz a gaso da benn pardon ar pec'hedoù.

Ur ger c'hoazh diwar-benn ar binijenn. Siwazh, ar binijenn a zo bet gwelet a-wechoù evel ur c'hastiz. Domaj eo ! Ar re o deus lavaret kement-se o deus komprenet grik. Ar binijenn a zo e gwirionez ur medisin roet deomp evit sikour ac'hanomp da gavout peoc'h ar c'halon. Ar beleg eo — ur medisin e c'heller lavaret — a ro deomp ar louzoù-se, n'eo ket evit ma vefemp pardonet (rak ar pardon a zo roet gant Doue), met evit ma c'hellfemp kemer perzh en hor silvidigezh ha da gempen ar pezh hon eus saotret.

Er c'hontrol, dre-se e c'hellomp kemer perzh en hor silvidiguez hag en hor redempcion. Ur c'hras eo, e gwirionez.

Breudeur ha C'hoarezed, tennomp e vad eus an amzer Azvent-mañ, amzer a chanchamant , evit kaout pardon Doue e sakramant ar c'hofez a-raok gouel Nedeleg.

Erfin, ar c'hemm-kredenn a dalv ivez bevañ en ur vod reizh goude hon emgav gant Doue. En Aviel e kondaon Yann-Vadezour nac'hadenn ar Farizianed hag ar Sadukeiz d'ur c'hemm-kredenn : "Ouenn dister! Piv en deus ho kemennet da dec'hout diouzh ar gounnar a zo o tont? Bezit prest evit ar chenchamant." Treiñ e vuhez a dalvez lakaat anezhiñ da glotañ bepred gant ar pezh a c'houlenn Doue diganeomp hag ar pezh a ziskouez Jezuz deomp.

Amañ, breudeur ha c'hoarezed, e rankomp teurel evezh ouzh ar c'heñveriañ etre hon feizh hag hon ober war an dachenn. Setu diazez ar gwir dreuzfurmadur. Unan eus daou dra eo : pe e tisplegomp hor feiz e Doue dre e embann, met ne lakaomp ket hon doare da vevañ da glotañ gant ar pezh a embannomp. En degouezh-se, ez omp un skouer kontrol, ha tamalet e vezomp, sur a-walc'h. Ha gant rezon. Pe e c'hellomp kuzhat hor feiz ha lakaat hor strivoù war ar test eus ar vuhez.

E gwirionez, ne rankomp ket enebañ ouzh an daou mod-se da vevañ hor buhez kristen, met kentoc'h o degemer hag o lakaat an daou da vont en-dro asembles. Ret eo deomp embann splann hor feiz e Jezuz ha reiñ testeni dre skouer hor buhez eus ar pezh a gredomp. Ha neuze, hon testeni a vo frouezhus. Disklêriañ hor feiz hep testeni ar vuhez n'eo ket a-walc'h. Testeni ar vuhez hep reiñ hor feiz da c'houzout a zo diglok. Ret eo kaout an daou.

Tennomp e vad eus an amzer an Azvent evit adreizhan hon doare da vevañ gant hor feiz kristen, hag hor feiz d'hon doare da vevañ. Kregiñ a ra a gonversion bepred gant un den e-unan a-raok gortoz anezhañ gant tud all. Bezomp skoueroù da re all ; en doare-se, e c'hellomp digeriñ hent an Aotrou. Amen!

2^{ème} Dimanche de l'Avent

« *Moi je vous baptise dans l'eau, en vue de la conversion. (...)
Lui vous baptisera dans l'Esprit-Saint et le feu. »*

Frères et Sœurs,

Ce deuxième dimanche de l'Avent nous entraîne au désert, là où Jean Baptiste annonce le royaume de Dieu et baptise. La prédication de Jean Baptiste repose sur un appel à la conversion : « Convertissez-vous, car le royaume des Cieux est tout proche. » Je voudrais réfléchir avec vous en ce temps de l'Avent sur ce qu'est la conversion.

En français courant, lorsque l'on entend parler quelqu'un de sa conversion, on voit en premier lieu un moment décisif où on a décidé d'ouvrir son cœur à Dieu et de lui dire 'oui'. Mais pour autant, la conversion ne peut pas être réduite qu'à un seul moment où nous avons dit 'oui' à Dieu. La conversion repose aussi sur un processus qui précède ce moment-là, processus pendant lequel Dieu a travaillé notre cœur et notre liberté ; et la conversion repose aussi sur un dynamisme qui suit le moment où nous avons dit 'oui' à Dieu, processus qui consiste à ajuster notre vie et notre manière de vivre à Dieu.

La conversion n'est donc pas seulement un moment, mais elle est une attitude dans laquelle on se laisse travailler par Dieu en vue de nous ouvrir à Lui. Étymologiquement le mot conversion vient du latin *con-vertere* et veut dire *se tourner vers*. L'attitude fondamentale de la conversion n'est pas l'obtention de la perfection mais elle consiste à se tourner vers Dieu. Pour prendre une image, c'est un petit peu comme une boussole qui nous donne toujours le nord. La conversion consiste à toujours se tourner vers Dieu et à rechercher Dieu, quels que soient les chemins sur lequel nous sommes : des chemins sûrs ou des chemins de traverse où nous nous sommes égarés.

Se tourner vers Dieu est donc le premier mouvement de la conversion. Le deuxième qui concerne l'orientation de notre vie repose surtout sur le fait qu'en toute situation nous cherchons d'abord à faire le bien conformément à ce que Jésus nous a enseigné et au don du baptême reçu. Ainsi donc, dans toutes les situations de notre vie, familiales, paroissiales, relationnelles, de conflit, nous devons toujours nous demander dans nos réactions : qu'est-ce qui servira le bien de la personne, des autres, et le mien ?

J'en viens maintenant à la question des deux baptêmes puisque la prédication de Jean Baptiste met en lien la conversion avec le baptême.

Il y a donc deux baptêmes : celui de Jean-Baptiste qui est dit un baptême d'eau et celui de Jésus qui est dit un baptême dans l'Esprit-Saint et le feu. Le premier est un rite qui invite à se reconnaître pécheurs et à la conversion : « Moi, je vous baptise dans l'eau, en vue de la conversion. » Le deuxième est un sacrement qui accomplit la conversion en donnant le pardon des péchés, ce que ne faisait pas le baptême de Jean-Baptiste, et en donnant les moyens de vivre la conversion de manière effective. Le premier prépare la conversion ; le deuxième l'accomplit.

On retrouve les effets de ces deux baptêmes dans le sacrement de la confession, appelé autrement sacrement du pardon ou de la réconciliation ou encore de la pénitence. Il y a 4 étapes dans la démarche du sacrement de la confession :

- 1) la contrition : il s'agit de se reconnaître pécheur et de regretter son péché.
- 2) la confession : il s'agit de déposer son péché, de le nommer, de le dire à un autre.
- 3) le pardon : le prêtre vous donne le pardon de Dieu par l'imposition des mains et la parole d'absolution.
- 4) la satisfaction : vous accomplissez la pénitence que le prêtre vous a donnée.

On peut dire que les deux premières étapes du sacrement de la confession (contrition et confession) correspondent au baptême de Jean-Baptiste. On voit bien qu'elles n'accomplissent pas la démarche de conversion. Les deux dernières étapes (le pardon et la satisfaction) correspondent au baptême administré par Jésus au sens où elles donnent le pardon des péchés et la dignité de pouvoir réparer son péché par la pénitence à accomplir.

Frères et Sœurs, la finalité du sacrement de la confession est triple : donner le pardon de Dieu sur toute personne qui le demande avec sincérité, permettre la réconciliation avec Dieu et avec les autres et enfin renouveler la vie baptismale entachée par le péché.

Toute vraie conversion passera à un moment donné par la rencontre en vérité avec Jésus devant qui nous déposerons notre vie, qui posera dessus un regard de miséricorde et d'Amour en nous libérant de notre péché et qui nous remettra debout en nous disant : « Va et désormais, ne pêche plus. »

L'être humain est ainsi fait qu'il a besoin des autres pour vivre ; il ne se suffit pas à lui-même. L'être humain ne se donne pas la vie à lui-même ; il la reçoit. Il ne se donne pas le pardon, il le reçoit. Pour grandir, pour vivre, il a besoin des autres. Pour être libéré, il a besoin des autres. L'altérité est nécessaire à sa vie. Et donc, il a besoin d'entendre un autre que lui lui dire : « Je te pardonne tous tes péchés ». C'est précisément cette altérité qui le libèrera ; et c'est cette parole efficace qui vient de Jésus qui accomplira le pardon des péchés.

Un mot encore sur la pénitence. Parfois malheureusement, la pénitence a été vue comme une punition. Quel dommage ! ceux qui ont dit ceci n'en ont rien compris. La pénitence est en fait un médicament qui nous est donné pour nous aider à retrouver la paix du cœur. C'est le prêtre -médecin pourrait-on dire- qui nous donne ce médicament non pas pour être pardonné (puisque le pardon vient de Dieu), mais pour que nous contribuions à notre salut et à la réparation de ce que nous avons abîmé. C'est au contraire un geste délicat qui nous rend participants de notre salut et nous rend digne ; nous participons à notre rédemption. C'est une grâce en fait.

Frères et Sœurs, profitons de ce temps de l'Avent, de ce temps de conversion, pour aller recevoir le pardon de Dieu dans le sacrement de la confession avant la fête de Noël.

Enfin, la conversion consiste aussi à vivre de manière cohérente suite à notre rencontre avec Dieu. Dans l'Évangile, Jean-Baptiste fustige le refus de conversion des Pharisiens et des Sadducéens : « Engeance de vipères ! qui vous a appris à fuir la colère qui vient ? Produisez donc un fruit digne de la conversion. » Convertir sa vie, c'est sans cesse l'ajuster à ce que Dieu nous demande et à ce que Jésus nous montre. Ici Frères et Sœurs, il faut faire attention à la cohérence entre ce que nous professons et notre témoignage de vie. Là se situe l'enjeu d'une vraie conversion. De deux choses l'une : ou bien nous professons notre foi en Dieu en l'annonçant, mais nous n'ajustons pas notre manière de vivre à ce que nous annonçons. Dans ce cas nous sommes un contre témoignage vivant, et on ne manquera pas de nous le renvoyer à la figure. Et à raison. Ou bien nous taisons notre foi et nous concentrons nos efforts sur le témoignage de vie.

En réalité il ne faut pas opposer ces deux axes sur lesquels repose notre vie chrétienne, mais il faut les assumer et les mettre en cohérence. Nous devons et annoncer explicitement notre foi en Jésus et témoigner par l'exemplarité de notre vie de ce en quoi nous croyons. Et alors là, notre témoignage sera fécond. L'annonce sans le témoignage de vie est insuffisante. Le témoignage de vie sans l'annonce n'est pas complet. Il faut les deux.

Profitons également de ce temps de l'Avent pour réajuster notre manière de vivre à notre foi chrétienne, et notre profession de foi à notre manière de vivre. La conversion commence toujours par soi-même avant de l'attendre chez les autres. Donnons l'exemple ; ainsi pourrons-nous préparer le chemin du Seigneur. Amen !